

KIS-540 – Hiniennded ha treüinded e preder Hans JONAS

(GE – 04 05 97)

[Tri rumm notennoù zo en destenn-mañ : 1° an notennoù traoñ merket : ¹, ²,..., 2° an notennoù yezhouriezh galvet dre ur * ha renket goude an destenn hervez urzh al lizherenneg, 3° an arroudoù saoznek orin roet holl a-gevret en dibenn, daveet dezho dre : (a), (b),....]

Unan eus amkanioù Hans JONAS¹ e voe diazezañ pezh a c'halve “ur Vevoniezh prederel” (*eine philosophische Biologie*) ha reiñ a-benn ar fin d'ar beved ar staelad gouziadoniel a vanke dezhañ.

“Ur vevoniezh anprederel zo ur vevoniezh alvezel rik o tic'houzout ez eus un dec'havaelañ gant danvez he studi : pa haez, pa c'hortoz, pa zouj, p'en devez aon, avez*, naon, sec'hed. [...] Eleze ez eo diziouerus ober stad a ziabarzhelezh, a c'houzrec'helezh evit meizañ ent vevoniel ergorelezh ar bevedeg.²” Ar bomm-mañ a ro dimp un alc'houez eus preder JONAS : pep bev zo da anaout evel gouzrec'h. Hon lak ivez da spurmantiñ an traoù en deus an erged da hepkoriñ. Hemañ da gentañ, o tennañ da zaou gemeradur Al. *Subjektivität* : ent voudoniel, evel *gouzrec'helezh*, andon unveziat eus ar buhezañ — penaos dedalvout un hevelep keal bevennat da estreget an den kuit a zenervannañ* ? ent anaoudoniel, evel *dangorelezh*, keal ken bevennat all na c'haller danzen nemet evel kendaveeg d'an ergorelezh — penaos komz eus ergorelezh ar bevedeg diwar ma ardaoler dangorelezh dezhañ ? Heklevioù diwar an trap-se a glever en termenoù a ra JONAS ganto : *Leben, life (beved pe buhez ?), Freiheit, freedom (rezid, frankiz, pe... ?)*. Ar gudenn evit al lenner eo dizoleiñ hag un devezout

¹ Hans JONAS (1903-1993), prederour a orin alaman, bet diskibl da HUSSERL, HEIDEGGER, BULTMANN ; sionour ken abred hag e grennardiezh, e voe ezel eus an *Haganah* etre 1935 ha 1943 kent engouestañ er *Jewish Brigade* ; divroet goude an eil Brezel bed, e renas ur remzad skolveurel e Kanada eus 1949 da 1955 hag er Stadoù-Unanet da c'houde. E levr brudetañ eo *Das Prinzip Verantwortung* [*Ar bennaenn atebegzh*] (1979). Ouzhpenn pleustriñ war divez ha kravez (nostegezh, kristeniezh), e strivas da zigej anien ar beved.

² *Erkenntnis und Verantwortung*, Lamuv-Verlag, Göttingen, 1991, p. 105 (in *Études Phénoménologiques*, 23-24, 1996, p. 22).

diles zo en tu all da ankewarded an termenou, o c'houzout e vez ankewer dre ret, ac'hoel da gentañ, an termenou a rekizer evit dezgeriañ kealioù digent. Pal JONAS eo, zoken ma ne lak kemm ebet evit ur gwel etre beved ha buhez, degas sklerijenn war ar meni Impalaeriezh ar Mezon ez eo ar beved. En notenn-mañ, hep distremen live ar beved enta, e tamantin da savlec'hiañ va frepoz an nesañ da vezad kreiz ur redenn eus ar brederouriezh kempred, komz a ran eus ar *c'hevandarzh*^{*}, eleze dispakadur ar beved diwar an alvez hag an den diwar ar beved, an alvez o terc'hel gwerc'h kevan er beved hag ar beved gwerc'h kevan en den¹. Diazez a gemerin war *Biological Foundations of Individuality*, pennad embannet gant Hans JONAS e 1968 e-barzh *International Philosophical Quarterly*, 8.

AN HINIENNDED*

“E hengoun ar Brederouriezh e voe e-pad pell meizad an hinienn e dalc'h meizad niverel an unanenn. An aters a zoded oa : petra a ra da zaou dra peurheñvel a-du-rall bezañ daou end-eeun ? « Peurheñvel a-du-rall » [kevun^{*}] a dalveze : hevelep a-fet genad ; ha pa ental « genad » kement a zo ardaoladus, boutin enta, e rank dre se an diforc'h niverel bezañ un diforc'h o sellout ouzh un dra bennak anezgeriadus. An kez tra anezgeriadus, a haered, zo an « danvez », skor andireadus an anien en devoudelezh (« Kement zo lies zo dezhañ danvez », ARISTOTELES, *Met.*, XII, 8). [...] E se e selled an danvez evel pennaenn an hiniennaat^{*} (*principium individuationis*)”^(a). A-gostez e lezin an arzael digoret gant ARISTOTELES hag ensammet gant TOMAZ AKWINO a-zivout danvez ha furm.

An danvez a hinienna ar furm. Nag an danvez nag ar furm n'int beziadoù. Hogen penaos e c'hell an danvez, a zo peuransavelet, bezañ pennaenn ar peursaveladur ez eo amparadur ar beziad ? TOMAZ AKWINO a yeas hebiou d'an amforzh dre lakaat kemm etre ur *materia prima* (danvez kentañ, materi) ansavelet glez hag ur *materia signata* (danvez arvezet, dafar — a voe da c'houde anvet *materia secunda*, danvez eilvet), e piaou d'ar c'hementad hervez amparoù 'zo (*quantitas dimensiva*).

¹ *Kevandarzh an dreüded* a rafen anezhañ ivez “*henoniezh an dreüded*” — o reiñ da “*henoniezh*” a ster a roe Michel FOUCAULT d'an termen en e ditl *L'Archéologie du savoir*, gant an diforc'h emañ savlec'hiet geneliezh an dreüded, nann en amzer ar sevenadur, met e hini an emdroadur — savlec'hiet ivez ar prantadoù kent, n'eo ket hepken en tremened, met ivez ha dreist-holl en “*donder*”, an alvez o vezañ bezant e “*don*” ar beved, ar beved e “*don*” an den.

An dehentadur aristotelek-skolastek a gas d'ar mennoz ez eo an egor hag an amzer pennaennoù an hiniennaat ; ez eo an hinienned un afer a zaveadur diavaez ; e berr, ez eo al lec'h hag ar pred a lak an hinienn da vezañ ar pezh ez eo. Ken abred hag an 13t kantved koulskoude e save ur redenn all a-rekin d'ar meizadur-se : endra loc'he ar Filozofer ha d'e heul an Akwinad diwar ar goubar hep diraez an hinienned estreget dre un hent nac'hek — o rekouriñ d'un « danvez » ansavelet, anezgeriadus —, e troe DUNS SCOT ouzh anien louer an traoù, o tiskleriañ ez eo pep hinienn unel drezi he unan, dre he solwez ha n'eo ket dre berzh darvoudoù a-ziavaez : an hinienned zo “un dra bennak piaouet a-ziabarzh gant an hennad hag andistagadus diouzh an derc'h anezhañ” ; soliet emañ pep beziad en e anien kentoc'h eget en e hanlec'h hag e hanbred. “An *haecceitas* (Sz. *thisness*, Br. *henned* pe marteze gwell : *hennev*) a zeu da glokaat ar *quidditas* (Sz. *whatness*, Br. *pezhev*) ; ar *Socratitas* da glokaat an *humanitas*.” Pevar c'hantved goude e kase LEIBNIZ d'ar par eizhañ tued anienelour DUNS SCOT : “N'eus nemet anienoù hiniennel, pep hini o vezañ dezv ur remzad bezout* unel empleg gant ar monad o werc'hennañ an kez anien unel.” N'eo mui an « danvez » met « endalc'had gouzrec'hel » an hinienn a zo pennaenn an hiniennaat, anien pep monad o vezañ dezv c'henel e istor emren.

Hans JONAS a bella diouzh an daou veizadur hengounel : “gant an eil ez eo an hinienned re ezien, daveadek ha dargouezhek ; gant egile re enmanus, emvastus ha tralenat ; ouzhpenn se, an daou a ra anezhi ur piaou hollerdalat a'h holl veziadoù louer, kevastenn da vezoud* dibarek pep hini ” (b). Ar pennañ rebech a ra d'an eil ha d'egile eo “ desellout an hinienn eus an diavaez, evel un ergorenn da anaout, dre notañ ar poentoù ma forc'h, evit un arvester, diouzh he meizad hollek. En eneb, e fell din darbenn un diarsell « diabarzh », oc'h atersiñ petra eo *bezañ* un hinienn — evit an hinienn he unan ” (c) (notomp ez emsavlec'h JONAS eno nesoc'h da DUNS SCOT eget da TOMAZ AKWINO). Ha, hep gortoz, e ro un diverrañ eus e gelennadurezh : “N'eus a hiniennoù nemet an hennadoù a zo beziat dre o gwezhiañ* piaouel (a zo ar bezout* o foellad en ur mod) : gant gerioù all, hennadoù a zo laosket en o bezout evit o bezout, e doare ma'z eo fiziet o bezout enno hag ez int karget d'e arzerc'hel dre wezhioù anezhañ aznevezet diastal. Hennadoù a vez dre se o bezout en ardizh an dazeilad : pe an divezout gourdrouruz bepred, pe ar seveniñ bezout evit parraat ouzh seurt gourdrour arstalek ; hennadoù enta, amzeriat en o natur biaouekañ, n'o devez ar bezout nemet dre zont dezhañ dalc'hmat, pep pred o tegas un argraf nevez en o istor ; a zo enta o hevelepted dre an amzer [o *zreüded*], n'eo ket hevelepted anniñv un dindanad trebadek [*treanded*, *treaniñ**], met hevelepted unangrouet ar c'hefleuniañ kendalc'hek [*treüiniñ**] ; hennadoù, erfin, nad eo o *diforc'h* diouzh an *All**, diouzh ar peb all eus an

traoù, na degouezhek na diangorzh* diouto, en eneb a zo un doare dialuskek eus o bezout, dre berzh ma'z eo tennder an kez diforc'h an araez en devez pep hini da emarzerc'hel en e anunded* bennozh d'an dispellañ ha d'ar c'heduniañ war un dro ouzh an all.” (d)

An despizadur a ra JONAS eus an hiniennded a zave, hervez m'en deus eñ erspizet, d'an diarsell diabarzh nemetken. E se en en intentfed a-walc'h evel un astenn d'ar beved mut eus deskrivadur hanvoudelour an hinienn denel, ken ne c'haller ket na ematersiñ war e gantreizh : ha n'eus ket eno un ervannañ hep mui ouzh ar bevion all eus pezh a soñjomp ni ac'hanomp hon unan ? Diouzhtu e teu ar respont : “Ar poentoù diabarzh bet deskrivet a ranker evel just mont dezho dre o arouezioù en anadurezh « diavaez », ar gwere korfel rik — ez omp aveet evit o « lenn », eleze evit o daznaout *evel* arouezioù a hiniennded, dre benn ma'z omp hiniennoù hon unan. Ha dav eo diskouez ez eo al luniadoù bezout diskoachet evel se kement hag aozioù an hiniennded evel mod bezout a-ziforc'h ha n'eo ket evel un doare diforzh eus nep beziad. Mar c'hoarvezje, hep rat dimp, d'an holl hennadoù gwerc'hel piaouañ an aozioù-se e mod pe vod — dreist reiz n'emañ ket an dro —, e rankjemp anaout hiniennded da gement hennad 'zo. A-du-rall ma ne vije ouzh o fiaouañ, evel a c'haller soñjal d'ur sell kentañ, nemet ar beziadoù a urzh ar « bersonded », e vije neuze krennet maez an hiniennded d'ar c'hant denel. Va zezenn e vo, e kement ma c'hellomp gouzout, ez eo aozioù an hiniennded e piaou ar bevedegoù hag ar bevedegoù hepken ha, nemet en ur feur lavaret, an holl vevedegoù ; ez int lod kevanek er beziad bev ; dre se ez eo domani an hiniennded, en e holl zerezioù, kevastenn da zomani ar beved en e bezh.” (e)

AN HEVELEPTED

HEVELEPTED AR BEZIADOU ALVEZEL

Un doare all da vont da argraf an hiniennded eo loc'hañ diwar argraf an hevelepted. “Atersomp : penaos en deus un hennad hevelepted ? Mar kemeromp skouer glasel an hiniennded olañ, *atomon* an Henatomourion, e tlefemp bezañ war c'hed da gavout gant hemañ an donig don eus an hevelepted. Met eno petra a dalvez hevelepted ? O tezeriañ an aters e mod all : mar dodan ez eo an atomenn er pred *A* par d'an atomenn er pred *B*, pe wir 'm eus da zodiñ seurt parder ? War be sol harpañ an

haeriñ hevelepted ? Ent veziadel*, emañ soliet war anniñv pe arstal arlakaet an danvez ; ent ouziadel*, war ar fiziañs a'm eus e c'haller bepred gwiriañ dre un arselliañ diastal ez eo bet an atomenn bezant e pep pred etre *A* ha *B* hep mank da ampoent ebet. Ent veziadel enta, e tezev an Atomour klasel un emhevelepted kentizhek, sonn, goullo avat ivez, kevatal d'an diangorzh* diouzh an amzer, eleze emañ ar peurzilerc'h diwar bep direadur « ur wech da vat » e-barzh pep hini eus an elfennoù hag emañ an kez elfennoù a-ziavaez an eil re d'ar re all ur wech da vat. E se, ar rannig andireadus unveziat zo ar pezh ez eo, didro hag anniñv, emhevelep rag-eeun, hep ma ve ezhomm da drezalc'h he emhevelepted evel ur gwezhañ eus he bezout. He fadout n'eo ket un azdervaat bezout, met un treañ hep mui ; he hevelepted zo *treanded*, bennozh da gendalc'hegezh ungenezh ar mentoù — egor hag amzer — ma vez loet steudad « he » stadoù. [...] An kez steudad a ya d'ober « treug » an elfenn hag, evit ma ardaolfed dezhi hevelepted, ez eo diziouerus na ve ode ebet en treug zoken mar bez en devoud spanaennek an arsellerezh : e par pennaenn da nebeutañ e rank kendalc'hegezh egoramzerel ar rannig bezañ gwiriadus a hed da hed.”^(f)

Diwar vont, e tizarbenn JONAS un abegadenn a c'hallfe dont a-berzh ar gorrfizikourion : ne c'haller ket ardaoliñ perzhioù ar Fizik klasel da elfennoù olañ an danvez : “ Ur galluster all eo erlec'hiañ ouzh kendalc'hegezh an hiniennoù, hini skeul an tebegezhioù pe ar « maez » ma loer seurt bezañsoù spanaennek, o saveteiñ dre se deskivadur an dreanded adkavet en ur par bloc'hekoc'h. En dro-mañ evel just e rekouromp d'ar gendalc'heg egoramzerel evel d'an desaveler kemezel.”^(g) Merkomp e chom gwiriek evit JONAS e domani an alvez pennaennoù an hiniennaat (*principia individuationis*) ez eo an egor hag an amzer evel m'o meize ARISTOTELES.

Da heul, hevelepted un ergorenn danvezel a c'hoarvez eus hevelepted stroll an elfennoù dastumet d'he amparañ keit ma veajont a-gevret en egor-amzer. “ Da vezañ sur ez eo chomet ur c'horf « an hevelep hini » etre div arselladenn e rankfe ar fizikour, ent derc'hek, lakaat merkoù hennadiñ [naoudioù*] war bep hini eus e atom ha gwiriañ ar wech da heul ha c'hoarvezout a ra ar c'horf bepred eus an holl atom merket [naoudiet*] hag eus hini all ebet. Betek prouiñ ar c'hontrol e tarbenner da spirus ar reolerezh a c'hoarvez a bouezañ an tolz. Ar goulakadur hollek eo e vez d'un danvezenn en he unan an un teskad parzhioù goude forzh pe daluad, forzh pet ensellad a ve graet. Kement-mañ a anver ent strizh *treanded* an dra.”^(h)

E gwir, n'eo ket mennoz JONAS difenn un arlakadenn fizikel : an hevelepted alvezel, *treanded an dra*, zo ur goulakadur labour a dalvez en e breder da zigej hepken

dre an hent nac'hek e vezad amkan a zo an hevelepted vevedel, *treiinded ar bev* — tennad kentañ o kavout poell gant ar re a zeu d'e heul.

HEVELEPTED AR BEZIADOU BEVEDEL

“Lakaomp e ve « naoudiet » unan a-douez ul lod amoeb e sell d'he hennadiñ da c'houde. Lakaomp ouzhpenn ez eo bet naoudiet ivez pep hini eus an atom a ya d'he ober. Da geñver un eil arselladenn e stader emañ an amoebenn bepred aze dindan he naoudi, hogen e par an elfennoù ez eus ur meskad atom naoudiet hag atom hep naoudi — ar sammad anezho o chom digemm dre vras. En un trede tro arsell e kaver atav he skritell war an amoebenn, nemet n'eus mui elfenn naoudiet ebet. [...] Ent alvezel enta emeur dirak un hennad all. Bevonour ebet avat ne asantfe klozañ diwar se n'emañ ket dirak an un hinienn vevedel.”⁽ⁱ⁾ Ent diac'hinek, mar paouezfe an elfennoù a gemmañ (e-doug ur prantad da nebeutañ) e welfe eno an azon ez eo aet an amoebenn d'un dra all, peogwir e ve marv. Splann eo ar vezañs eus div hevelepted : hini an atom, arlakaet, “prestet”, *kedet** dezho e kement ma reer anezho ergorennoù, hini ar bev a lenner warnañ dre an un skiant a ra dimp dec'havaelañ, *koaliñ** hon hevelepted-ni a zenion, nad eo ket enta kedet dezhañ met *piaouet* gantañ — doare gwerc'hek ha n'eo ket derc'hek eus an hinienn. Goude kevenebiñ an devoud *gouziadel* ez eo treanded an elfennoù alvezel ouzh an devoud *beziadel* ez eo treiinded ar bevion, e pouez JONAS war un trede devoud a zo ar *c'hesoutañ** etrezo. “Testeni ar « skritell » zo gwir *agesout* end-eeun gant hini an « elfennoù », rak hemañ a gont *istor* an hevelepted bonnet gant hennezh. E se emamp dirak devoud beziadel (ha n'eo ket hepken gouziadel) un hevelepted disheñvel krenn diouzh an hevelepted alvezel, eviti da soliañ war genweredoù un dindanad a hevelepted alvezel. Dimp d'ober meiz war an devoud beziadel eston-se.”^(j) Da seveniñ an erged-mañ e voulc'h JONAS un dehentadur o tremen dre vezadoù a zo nevez, evito da wiskañ anvadoù klasel — seurt skoilh geriadet zo unan eus diaesterioù e brederouriezh, an dro eo dimp atav da glask termenoù azasoc'h.

Kentañ meizad digejet eo pezh a ra anezhañ *freedom*. “Hervez doare ez eus ur stad a draoù diac'hinek. Diouzh un tu e *c'hoarvez* ar bev a zanzev hag e vez e werc'helezh en arun* klok e pep mare gant e zafar kempred — eleze gant ul liested a gedrannoù hiniennel savelet. Diouzh an tu all ned eo ar bev hevelep nag ouzh al liested-se nag ouzh sammad diaser all a seurt ganti, n'emañ ket stag e werc'helezh ouzh ar c'henstroll a ro dezhañ e neuz bremañ er feur ma steuz hemañ dizehan en ardraoñ eus lanvad an eskemmoù ; er c'heñver-se ez eo ar bev estreget e zafar ha ned eo ket ar

sammad anezho. Emaomp e se dirak un hennad solwezel a zo dezhañ ur meni *freedom* e-keñver e solwez, un dizalc'h e-keñver an danvez end-eeun a ya koulskoude d'e ober en e bezh.”^(k)

Ar gudenn a yezhouriezh o sevel amañ eo penaos envel kuit a forc'hellegezh an « dizalc'h » ma vez ar bev diouzh an tamm danvez ez eo ivez. Anat eo ne zere ket kevatalioù boas Sz. *freedom* : *rezid* zo da zerc'hel en e arver buhezel ; *frankiz* zo damgevazas amañ, ha pa ve hepken en askont eus e arverioù kevredadel ha politikel. Kinnig a ran reiñ mon d'un termen all hogos dianav, meneget gant PELletier : “ *disanc*, libre, non gêné ni retenu ”. Deurusted ar ger eo e kaver ennañ ar stirann *-ank-* "mont" : emañ diforc'helezh ar bev en ur perzh dialuskel, er *mont* diastal diwar e zindanad alvezel, en *dizankañ** ; evit Br. *dizank** a rafen anezhañ ken un adanv, ken ur pennanv gourel (hep disteurel *dizankted** b. da arverañ diouzh rekis). An arroud diagent eus testenn JONAS a adaozfen enta evel henn : “ [...] un hennad solwezel a zo dezhañ *dizank* e-keñver e solwez [...] ” pe, eeunoc'h : “ [...] a zo *dizank* e-keñver e solwez [...] ”.

Kenderc'hel a ra JONAS : “ Koulskoude, evitañ da vezañ dizalc'h diouzh treanded an danvez en gra, emañ [an kez hennad solwezel] e dalc'h ar c'hemmoù a c'hoarvez ennañ, e dalc'h e enraog trebad ha spirus, hag er c'heñver-se n'eo ket dizank. Embreg an dizankañ gant ar bev zo kentoc'h un *necessity* rik. *Necessity* a anvomp *ezhomm*, *ezhomm* o ren el lec'h hepken ma ne vez ket diogel ar bezout ha ma'z eo an dreüded ur poellad diastal.”^(l) Ar frazenn eildiwezhañ o todiñ war un ton hegelian kevatalded ar *freedom* hag an *necessity* zo evit an aozer un tun da skoeviñ forc'hellegezh an termen *freedom*; un droidigezh o tamantiñ d'ar ster muioc'h eget d'ar gerioù a yafe hebiou dezhi hag a adskrivfe ar bomm evel henn : “ Dizank eo ar bev, nemet e rank groñs embreger e zizankted — *rankout* a anvomp *ezhomm* [...] ” (heklev all, ar wech-mañ da aforism SARTRE : “ Kondaonet eo mab den d'ar rezid.”)

Un arvez all eus an diac'hinad zo lakaet war wel gant ebarzhiñ keal an amzerelezh. “ Ar bev a revez da ne vern pe ampoent e-barzh ur genaoc diaser a zafaroù, hogen ned eo ket hevelep outi — dre ma vez bepred, hag eñ en arun ganti, endeo o tremen en tu all dezhi. Diwar neuze, a-hed e hoali, ez eus ur c'henheuilh a genaotioù danvezel ma tremen drezo, hep bezañ hevelep nag ouzh ar c'henheuilh nag ouzh ar sammad klok anezhañ — dre ma vez en e bezh e pep hini eus ar c'henaotioù. A se ned eo e hevelepted na hevelepted predel e barzhioù egorel kempred — neuze en

dije kellies a hevelepted¹ ha ma ve a bredoù kenheuilh, eleze hini ebet —, na hevelepted vloc'hel steudad ar c'henheuilh eus e genaozioù kempred — ne c'hoarvezje neuze e pep pred nemet eus ur rann anezhañ e unan.” (m)

An diac'hinad, ur wech dispaket fraezh, a ro da JONAS an dro da arnodiñ lies despizadur eus an hevelepted vevedel.

“Didro e vije mar galljed lavarout eo an « ene » dodet evel un hennad a-ziforc'h a zo douger an dreüded a-dreuz d'ar c'hemmañ diastal. E seurt degouezh, e vije ar c'hemmañ korfel d'ar gouzrec'h evel ar c'hemmañ dilhad d'an hini o doug ; klokaet e vije al leterc'had oc'h ober eus douger an dilhad o gwiader war un dro. Skoeviñ ar gudenn ne vije ken koulskoude dre un taol sigoterezh trabedoniell. Koulz e vije lavarout n'eo ket ar c'horf a zo bev, met un dra bennak all : ar c'horf « bev » ne vije ket muioc'h eget ur vargodenn. Hogen emañ ar gudenn gant doare bezout endeeun ar bevedeg e unan, na pa ve hemañ, ouzhpenn, gwiskamant un dra bennak all pe get. An oberiezhoù ma emañ engwezhiet zo e re dezhañ pe ned eo ket bev. An hevelepted a imbourc'homp ne c'hell ket bezañ digevredet dioutañ ha debarzhet d'un douger all. An disrann etre « gwiader » ha « gwiad », amprestet diouzh ar pleuskerezh gant mab den eus dafaroù anvev, a zistruj evit gwir ergorenn an imbourc'h. ” (n)

Ar goulun korf-ene o vezañ un hent bac'h, e tistro an aozer etrezek ARISTOTELES : “ Sklaer eo hon eus d'ober e mod pe vod gant ar c'heñver etre danvez ha furm. Rak un dra da nebeutañ a vez arzalc'het a-dreuz da gemm ar c'hedelfennoù, un arvez eus an hevelepted o chom digemm, eo a dra sur « furm » an hollenn vevedel, ha se n'eo ket hepken evel neuz hewel, hogen evel an urzh luniadel ha dialuskel en he fezh eus an daskenad* a ra ar bev. Ur skouer glasel eus ar seurt arzalc'h hevelepted e-ser ar furm eo al lestr a lorc'h brudet a rae a-viskoazh bep bloaz ar veaj eus Aten da

¹ Goulven PENNAOD a'm lakae da notañ ne vez ket lakaet el liester ar pennanvioù dre *-ded, -ted*. Hep bezañ glan(hen)yezhour ez anzavan e ro din e evezhiadenn an dro da verzhout daou generadur diforc'h eus *Sz. identity*, *Gl. identité*. Ur c'hemeradur e-keñver bezout : ar bezañ hevelep en egor-amzer, a zec'heriomp dre Br. *hevelepted, treüded*, h.a. ; ur c'hemeradur e-keñver anaout : evit an den, ent louere, ar "piv eo", a c'hallfed dec'heriañ dre Br. *pivev*, gant an deveradoù goubarel Br. *pivded* (ar "bezañ piv") ha *pivelezh* ("perzh bezañ piv") — diwar vont, merkomp e vije bet graet eus ar *gartenn bivelezh* kenkoulz all ar *gartenn bivev* "testeni eus piv eo he fiaouer" ; evit an anden e c'haller deverañ diwar Br. *pezh : pezhev* (sl. KIS-534, La-11, p. 181), *pezhded, pezhelezh*. En destenn e viran *hevelepted* da zerc'hel poell an displeg, nemet e ve resisoc'h dezgeriañ : “ kellies a *bezhev(ioù)*, pe a *bezhelezh(ioù)* ”.

nevedenn Delos ; bet ratreet hag adratreet dre amsaviñ an tammoù uzet, ne oa ennañ a-benn ar fin planken ebet, kordenn ebet, gouel ebet a orin ha koulskoude e chome an un lestr evit an holl a oad da oad. War betra soliañ amañ haeradur an hevelepted ? Da gentañ, evel just, war unded ar furm. Re nebeut eo avat : un eilad dik eus al lestr a vije bet un hinienn a un genad, met nann an un hinienn [*kevun** met nann *treün**]. War un dro ez eo re, rak daskemmoù 'zo er furm evel an azdod pe an dilam eus ur parzh pe barzh ne virent ket al lestr a vezañ an un « hinienn ». Ouzhpenn heñvelder kendalc'hek ar furm, e tle bezañ ur gendalc'hegezh egoramzerel en he gwerc'hennadur, eleze e reveziadur ar genaoc alvezel gwisket ganti : un heul didorr a vezañs alvezel a ya d'ober istor ur gouzrec'h. [...] E se, heñvelder ar furm hag unded an istor eo a ra hevelepted an draezenn daoust ma vez peurgemmet an dafaroù ha, diouzh an dro, darn gemmet ar furm.”^(o)

Kammed nevez en dehentadur nac'hek, goude stadañ emañ gant ar bevedeg an daou zezverk a hevelepted piaouet gant al lestr atenienn, e lak an aozer a-wel daou zezverk all piaouel d'ar bevedeg hepken :

~ “ da gentañ, tra ma vez kemmet pezhioù al lestr eus an diavaez gant gwezherion diforc'h dioutañ, al lestr o vezañ ergorenn c'houzañvat enta, er bevedeg e vez ar c'hemmoù, ken an distres ken an astres, renet eus an diabarzh : an hennad e unan zo gwezher e gemmoù ;

~ “ d'an eil, e tro ar vag ne c'hoarvez ar ret astresañ nemet dre zarvoud : berzhus pe verzhusoc'h e c'hell hi bezañ en he beajoù ha pa vez er goudor e chom anterin, salv a uzadur ; e tro ar bevedeg ez eo lodek en e vezout koulz an ezhomm (pa sav dioutañ) hag ar gwalc'hadur, dre ma c'hoarvez e vezout end-eeun eus an etrewered nevez bepred etre ezhomm ha gwalc'hadur. Ha tra ma seller evel ur merk a zreisted evit al lestr padout ouzh an arver hep rekizañ ratreadurioù, evit ar bevedeg n'eo ket hepkoriñ an uzadur a zo merk an dreisted, met efedusted ar ratreañ —muioc'h c'hoazh, diseurted hag ampled an *ezhommou* ganet gant ar bezout e unan. Evitañ, bezout zo seveniñ, evit ar vag ez int daou dra distag.”^(p)

Er poent-mañ eus e hollc'h, e stign JONAS un argraf a anadennoiezh : pe dreug zo bet da amparadur an hevelepted a stadomp gant al lestr ? Tro 'm eus bet da blediñ gant an aters-mañ¹. Diskouezet 'm eus e vez treüded an traoù bepred *kedet** gant piaouer andoniek an dreüded ez eo an den ; kemm 'm eus lakaet etre *treüded*

¹ Sl. KIS-397, La-10, pp. 397-398.

kengounaouet ar menez ha *treüinded kengouzerc'het* ar re votoù — anat eo hon eus d'ober ouzh ar stumm-mañ diwezhañ e tro ar vag. “Hogen an arselladenn grennus evit gwir eo e vez *kedet* an dreüinded d'ar c'halvezad ; [...] emañ treüinded al lestr a-zalc'h ouzh un dreüinded all, an hini stalet er c'hounerezh hiniennel ha strollennel. Rakrekis eo seurt treüinded andoniek eus gouzrec'h an anaout evit an dreüinded *kedet* d'an draezenn. An kez treüinded andoniek avat, o vezañ hini bevion all, zo un degouezh eus pezh a imbourc'homp ha mard eo rekis da zisplegañ treüinded an traezoù, ez eo treüinded an traezoù un hent bac'h evit a sell mont da dreüinded ar bevion. Houmañ, e welet hon eus, a vez piaouet gant he gouzrec'h, ne vez ket *kedet* dezhañ.”⁽⁹⁾

E ergerzh anadennoniel a zegas an aozer d'ober anv eus an *davedelezh*^{*}, keal hemañ o hentiñ ar Brederouriezh adalek he derou ha deuet d'un aval a zisklev etre ar vevoniourion. Kent ober war-dro an davedelezh a ve pe na ve ket gant ar bev, e venn JONAS sellout ouzh davedelezh an traezoù ha, peogwir emañ ganti, davedelezh bag Ateniz. “An imbourc'h war an dreüinded e kement ma'z eo « *kedet hep mui* » a ranker astenn betek darbenn ez eo an *davediñ*^{*} diavaez a rae gwelout « an hevelep lestr bepred » goude an holl ratreadurioù, an *davediñ* end-eeun en doa lakaet devredañ *ober* ar ratreadurioù ha da gentañ holl oberiañ al lestr e unan : diouzh savboent an ober evel diouzh hini an anaout emañ an dreüinded a-zalc'h ouzh un *davedelezh* en diavaez eus an ergorenn. Evit an davediñ buhez gant an oberier, an arveriad hag an arseller e oa ar solwez er furm hag an darvoud en danvez. Ne c'haller ket kredekaat al lestr eus un davediñ a seurt-se ; e termenou aristotelek n'eus ket un « entelekiezh » anezhañ. N'eus ket anezhañ un hinienn wir kennebeut ha, steudad e stadoù kenheuilh lakaet a-gostez, n'eus e mare ebet gantañ hevelepted unadel, *treüinded*, met hepken *treanded* pep hini eus e barzhioù. Dre se, kudenn « e » dreüinded a-dreuz d'ar c'hemmañ n'eus ket anezhi.”⁽¹⁰⁾

Evel an droellenn o tistreiñ d'ar par ma loc'has met uheloc'h, ez adkav devez ar prederour e aters : petra a ra d'ar bev bezañ un hinienn wirion, eleze piaouañ un dreüinded andoniek ? “Gant kendalc'hegezh kennevidel bresk ar furm vevedel a-dreuz da nevezadur diastal he c'hedrannou, ned eo ket an hevelepted evit dinaouiñ diouzh an dindanad. Ne spir ket d'he amparañ kennebeut trezalc'h ar patrom a-hed an holl dreuzweredoù. [...] E se, an heñvelded (en he uc'hañ, ar gevunded) furm n'eo ket an unded vezout, an dreüinded ; hag, evit an un furm, erzerc'hañ didorr en ul lerc'hiad plegennoù alvezel n'eo ket a-walc'h evit ober eus seurt erzerc'hted a steudad erzerc'hted un hinienn dreün. Anez e vije flamm ur c'houlaoouenn, arstalek bonnou he furm o trebadout keit ma tev ingal an helosk euvret ha dilaosket lerc'h ouzh lerc'h, un degouezh a dreüinded hiniennel. Dre se, nag an danvez, nag ar furm, nag o c'hejañ —

ar *suñolon* ma respiz drezañ ARISTOTELES ar solwez hiniennel — ne spiront da amparañ an hevelepted a zo hini ar bevedeg.”^(s)

O pellaat adarre diouzh ar goulun aristotelek, JONAS a laka war wel etre danvez ha furm un darempred n'eo mui goubarel, diasavel hogen louere, dialuskel. “Mar hon eus notet agentaou treüded ar furm oc'h emvoueta dizank « he unan » dre eskemmañ he danvez, hon eus bremañ da gemer a-zevri an emod « he unan », eleze hanlec'hiañ an dreüded e-barzh un dra bennak o kerzañ hag oc'h embreger an kez dizankted — pezh na oufe ket ober ar furm c'houbare. E berr, a-dreñv kendalc'hegezh ar furm e rekiz an hinienn veziat un treün* *diabarzh*, ur gouzrec'h d'he bezout *gwezhiat* (*in actu*). Ar « furm » he unan, eleze al luniad oc'h araezañ ent dialuskel e emgemmir — ha gant hemañ pep gouested d'ur frammañ en amkan-se, pezh a zo ent furmel kelc'h bac'h ur ouested da gemmirout ar ouested — a ranker sellout evel o vezañ en *arempred* seurt treüded emzaveet.”^(t)

Dizankted ar bev zo he orin er bev e unan, ned eo ket disoc'h ur savelegezh estren d'an hinienn — e se e wisk doareoù eus ar rezid, pa'z eus anezhi un diouzerc'h a'r rezid, pezh a ro da gompren en he galver *freedom* e diouer un termen azasoc'h. Dizankañ avat zo un « ankañ », ur mont ha dre se emañ en orin ur redi, ar rankout arzerc'hel an dialusk ez eo, dre arzerc'hel lanvad an danvez dre gorf ar bev, ar rankout ren ar c'hennevid. Alese keal an *ezhomm* lakaet gant JONAS da arvez kevanek an dizank. “Arvez an « ezhomm » hon doug en tu-hont d'an diangorzh* ez eo hini ar c'heñver eeun furm-danvez. Diagent hon eus lavaret ez eo an « dizank » piaouet e-keñver an danvez gant an hennad bev — eleze kennevidat — kevatal d'ar rankout embreger an dizank-se end-eeun. Rankout a zo e anv all an ezhomm, eleze an ezhomm da emneveziñ diastal, an ezhomm eus an danvez rekis evit emneveziñ, dre se an ezhomm eus ar « bed* ».”^(u)

Tro a gav JONAS aze da gevenebañ ar ret evel m'en kaver er bev e rezh an ezhomm (a ran ar « rankout » anezhañ) hag evel m'emañ en alvez e rezh ar savelegezh. “An ezhomm, an dienez, ar skorted zo ken naouus d'ar beved ha ma'z eo e c'halloud, an tu all eus hemañ n'int ken. Eno emañ ar gaou gant monadologiezh LEIBNIZ [...]. Ar monad, kloz warnañ e unan, oc'h emweredelaat, aneueradus, zo hep mar pimpatrom meizad klasel ar solwez dizalc'h « na rekiz netra all evit revout » gouez d'an despizadur. Hogen seurt emspiriñ, mar bez anezhañ, zo hini an dafar anniñv. Eus ur rannig danvez e c'haller da vihanañ empentañ n'he deus « ezhomm » a netra diavaez evit revout. Bez' ez eo pezh eo, ha traoù all pe get a ve en-dro dezhi. Dec'hmeañ a

c'haller e ve ar peb all eus an alvez kaset da get hag e ve bepred eus an un atomenn digenvez ; trebad he revoud a c'houlakaer o tinaouiñ en holl diouzh an devoud e voe anezhi un deiz. Mar bez re all en-dro dezhi e kenwaredo ganto, hogen he gwered warno hag o gwered warni zo darvoudoù e-keñver ar solwez digemm ez eo hi. He dizalc'h avat n'en deus tra da welout gant dizank ar bev ; en eneb, e ezlakaat a ra. Revoud ar rannig zo roet, ned eo ket ur poellad da seveniñ ; a se ez eus ganti savelegezh, n'eo ket ezhommoù.”^(v)

Keal a bouez eo ar c'hennevid e preder JONAS. E nevezin, e sklaeriañ a ra dre e ziframañ diouzh ar ster bastard, bevgimiek, en deus er Vevoniezh klasel. An dizank hag an ezhomm, piaou digen* ar beved, zo arvezioù an eil d'egile. “Ar c'hennevid zo ennañ an daou arvez-se, pezh a dalvez ez eo an dizankañ ur rankout spesadel d'ar beved. Bezout ar bev, gallusted war c'hed, a vez da weredelaat dre *arverañ* ar bed*. Ar gallout arverañ ar bed, brient unel (unveziadel) a'r beved zo dezhañ da c'hourzhtu dik ar rankout e arverañ. Evit ar bevedeg, bezout zo e gwir arverañ ha padout da arverañ « un dra bennak all » — ha dre se kaout ezhomm anezhañ. Seurt amzalc'h eo ar priz da baeañ gant ar solwez kezivik evit emvrokañ war hentoù ar beved, eleze an unanmparañ, an treüniñ, e-lec'h menel gant an trebadout anniñv, an treaniñ. En askont eus mod kennevidel an treüniñ emañ an ezhomm kevanek outañ adal an derou, lodek ma'z eo en e anien. Hogen an *araezioù* o unan engwezhiet en arempred an ezhomm, evel an haeziñ, al loc'hañ, an aveziñ*, a zegas rummoù ezhommoù nevez war c'horre an ezhomm kennevidel diazez — ha ganto rummoù gwalc'hadoù nevez. Daelerezh hemañ a zo lodek ivez en anien ar beved. Skalfad an ezhommoù e piaou ur bevedeg zo muzul derez an dizankted hag an hiniendded ez eo e re.”^(w)

Unan eus an degasadennoù pouezusañ a ra JONAS eo diskouez ar beved evel un divrazañ eus ar vuhez — evitañ da zianaout en termenou ar c'hemm etre an daou geal. “Ar pezh emeur o paouez brastresañ zo kement ha lavarout an dra-mañ a-zivout anadenn ar *c'hennevid* e unan : alies ne reer anezhañ nemet al live elfennel o c'houstennañ an arc'hwelioù, disheñvel mat hag a live uheloc'h, eus ar beved (evel an haeziñ, al loc'hañ hag an aveziñ)¹ hag o pourchas gremm dezho, hogen en e c'henezh end-eeun emañ endeo divrazadur an holl arc'hwelioù-se, hag int o tiorren pe get diwar

¹ Ken feleun all da vennoz JONAS — dibenn an arroud en derva — e ve lakaat e-kichen an droidigezh-se (ha n'eo ket en he lec'h) houmañ : “[...] eus ar vuhez (evel ar merzhout, an emzilec'hiañ, ar c'hoantaat) ”.

an diazez ez eo. An diouzerc'h anezho eo dre stigmañ diwar an derou *ennañ e unan* an daougleinoù priñvel a vo astennet ha dispaket gant an kez arc'hwelioù dre savelañ daveadurioù dibarekoc'h : *daouglein ar bout hag an anvout, an an-un* hag ar bed, ar rezid hag ar retvez.*”^(x)

Ar pouezusañ holl, da'm meno, e « bevoniezh prederel » JONAS eo merkañ derou beziadel, kevandarzhel, an anunded, an *ipseitas*. “ Ebarzhiñ an termen « an-un », na c'haller ket tremen hebiou dezhañ o teskrivañ ar beved diwar e bar elfennekañ, a verk an eskor gant ar beved end-eeun eus an dreüded — ha, da heul, a-unan gant an kez eskor, an emdenn a ra ar beved diouzh ar peb all eus an draelezh. Anunded* ar bevedeg a c'hoarvez eus e gevanded hag e ziungenezh don e diabarzh, hag e dargemm ouzh, un hollvetou ma revez un etrewerediñ ungenezh ; eus e dreüniñ a zo emaddervaat pred goude pred, emgefleuniañ ha daeañ nerzhoù kompezus an treaniñ alvezel tro-dro, e gwir emsevel ouzh ar peb all eus an traoù. En daougleinded arvarus ma emdaol ar beved war eskor, ar pezh nad eo ket « an-un » hag a lak eus an diavaez bevennoù da zomani an dreüded a zeu diouzhtu da gemer evit ar bev dremm an allded* rik. Daeadenn an « anunded » a wisk war gement a zo en tu all da harzoù ar bevedeg un dremm estren hag, en ur mod, enebus : dremm ur « bed » ma rank ar bevedeg derc'hel ennañ, drezañ hag outañ. Anez ar seurt gourzhtu hollveziadel a « allded » ne vije ket a « anunded ».”^(y)

Ar c'hevenebad a lak JONAS etre diungenezh, bevennegezh aniel ar bev ken en egor, ken en amzer — an dizank o vezañ ar striv² didorr en kas eus e c'hanedigezh d'e varv — hag ungenezh, anvevennegezh an alvez a daol ur gouloù nevez war grefen boniekañ ar Brederouriezh. Da skouer, pa lavar KANT en e *Kritik der reinen Vernunft* : “ D'ar bed ez eus un derou en amzer ha bevennoù en egor ; d'ar bed n'eus derou ebet en amzer na bevenn ebet en egor pa'z eo anvevenn koulz en amzer hag en egor ”, ez eur techet da verzhout eno akademegezh pur ha da azgwelout ar c'hourzhdezh dre c'houlenn da gentañ petra a venn KANT lakaat dindan ar ger « bed » : mard eo an alvez, a dra sur ez eo euver komz a vevennoù, met mard eo ar beved, ne c'hell bezañ nemet bevennoù — ha mard eo ar vuhez...

Un evezhiadenn diwar vont : pa ra JONAS anv eus « hiniennded ar rannig danvez, an atomenn », n'eus da welout eno nemet ur goulakadur labour, diwar an ezhomme en deus da zigej an hevelepted vevedel dre he

² Pelloc'h e welimp e ra eus ar striv-se ur *conatus*, ur *vrouer** da badout er bezout.

c'hevenebiñ ouzh un hevelepted alvezel. E gwir, hiniennded an atomenn zo na mui na maez un hiniennded *kedet**, *kengounaouet*, evel hini ar menez pe ar gelc'houdenn. Ar c'hemm nemetañ eo e vez kengounaouet ar menez gant ar vroiz pe an douaroniour, ar gelc'houdenn gant an hinour hag an atomenn gant ar fizikour. An dreüded andoniek zo piaou an hinienn vev : pep bev a vez o treüniñ en e bart eus e c'hanedigezh d'e varv. Mar fell dimp avat ober gant keal an *dreanded* e rankomp bezañ evezhiek. Ankevasas eo arloañ seurt keal d'un ergorenn alvezel, maen pe atomenn, dezho hiniennded, ha dre se treüded, *kedet*. An dreanded avat zo ur c'heal bevennat savelet dre un hent nac'hek ha ne oufe bezañ estreget ur perzh eus an alvez kemeret en e bezh. Evit distreiñ da vod devezout ARISTOTELES ha TOMAZ AKWINO, e ve eus an dreanded ur *materi* o c'hortoz bezañ enfurmet gant ar beved — a lakfe da eskoriñ diwarnañ hiniennded ha treüded. Kel hon eus graet eus an denervannañ*, a zo prestañ diaviz doareoù denel d'an andenel. Diaesoc'h a galz eo emzizober diouzh pezh a anvfen ar *bevervannañ*. Anaout a reomp ar bevion dre benn ma'z omp bevion hon unan ; an treüded a stadomp enno hag ennomp. Hogen kalz pelloc'h diouzhimp emañ an anvev daoust d'an touell brevus a vez war hon sell outañ. Anat eo dimp e vez Piramid Egipt o trebadout, o « treaniñ » a-dreuz o fergont kantved : hogos dic'hallus eo darbenn ned eo ket o « zreanded » estreget an dreüded a blakomp warno. Met dindan ar plakadur, masklet gant an adsked ac'hanomp, daoust hag ur gwel pur omp gouest da gaout eus an dreanded ? Ha ken pell-se omp aet diouzh ar pobloù a wele ar bed evel ur bev bras ?

“ Bout pe na vout ” : emañ dazeilad Hamlet gwriennet ken don ha diazezoù ar beved. Dalc'hmat e vez ar bevedeg en dazeilad « bezout pe na vezout ». E dreüniñ “ne vez ket diogelet diwar-bouez trebadout anniñv un danvezenn, met erounezet e vez diastal dre ur *gwezhiañ*, dre ar pezh a rank bezañ graet evit padout hep mui : emañ bezout-pe-na-vezout e dalc'h ober-pe-na-ober pezh a zo d'ober evit derc'hel da vezout ”. Hag amañ e teu gant ar prederour amerikan un heklev eus kelennadurezh HEIDEGGER pa ziskler : “ Hogen d'ur beziad a gendalc'h da vezout diwar-bouez ur *gwezhiañ* azgenezhiñ diastal ez arzodomp an *damant* ¹ . An damant izek zo damant da vezout, eleze da zerc'hel da vezout — pezh a rae SPINOZA anezhañ ar *vrouer** (*conatus*) da badout er bezout.” Diouzhtu avat e tizank JONAS diouzh mestr e yaouankiz e sigur distremen devez SPINOZA pa gloz : “ Hogen SPINOZA, gant

¹ Gant HEIDEGGER, ez eo an *damant* (Al. *Sorge*) ar pezh eo an *Dasein* end-eeun, adavidik, o rankout ensammañ e vezout. JONAS a ra gant Sz. *concern*. Pouezañ a ran c'hoazh war nevezded e breder : tra ma lakae HEIDEGGER ar *Sorge* e piaou mab den, JONAS en gwel evel ur perzh anienel eus ar beved endeo.

anaoudegezhioù e amzer, n'en deus ket merzhet ne c'hell ar *vrouer* da drebadaout er bezout nemet gwezhiañ evel ul lusk o vont diastal *en tu-hont* d'ar stad a draoù a zo. Ar pezh a hañval bezañ, en e zisoc'h hollel, an trezalc'h hepken eus ar saviad a vez kefleuniet diwar-bouez ul lusk didorr davit un tu-hont d'ar saviad. Bez' ez eus un digor, un dremmwel, enien d'ar bezout end-eeun eus an hinienn vev. En angorzh* e vezout, engwezhiet en afer e vezout, e rank *dre zamant* d'e vezout diskregiñ dioutañ evel m'emañ bremañ e doare da gaout krog war ar bezout evel ma vo. Trebadout eviti zo bepred muioc'h eget kemmirout*^(z). An dreüded zo dalc'hmat da ober, zo un dober, dre se ez eo kevazasoc'h he gervel un *treüniñ*, renet a-dal d'an allded — tro hor bo da welout eno an arvez all eus ar beved ez eo an *davedelezh*.

[Ar peb all eus pennad Hans JONAS a lezan a-gostez : plediñ a ra gant an davedelezh, a'm bo tro, 'm eus spi, da zistreiñ warni en un notenn all, ha gant perzhioù piaouel al loen, a zo er-maez eus ar stern a'm eus merket d'ar studienn-mañ.]

NOTENNOU YEZHOURIEZH

[Etre sonnelloù emañ niverennoù pajennoù an destenn.]

Br. **all** aa.& g., **allded** b. [213, 223 & passim]. Gant *all* hag *un* e tec'herier daou vezad diazez eus ar preder kevenep hag andespizadus na c'hell ar Brederouriezh nemet adtremen dibenndermen warno o tispakañ arvezioù nevez anezho. Hervez an diskiblezhioù e tegouezh meizad an *all* gant arverioù ha dec'heriadoù diseurt. Loazioù ar brezhoneg hiziv :

~ er Gevredadouriezh : *hentez* g. "an dud all, an neb a henter" (sl. *Emsav* 59, 1971, p. 370) ;

~ er Bredelfennerezh : *amgen* aa. & g. "an den all, an dud all erouez", sk. : " an damant d'an *amgen* " (GBLF. ¶ 137, sl. ivez ¶ 137 □) ;

~ er Boelloniezh, er Jedoniezh : *all*, *amgen* "diforc'h ent niverel, o revout a-ziforc'h" (sl. KIS-471, La-10, pp. 272 hh. ; KIS-474, id., pp. 282 hh.) ; a-zivout keal an « diforc'h niverel », sl. [211] ;

~ e diskiblezhioù diseurt, da verkañ an allded e keñver pe geñver e reer

gant ar rakger *all-* : *allyezh*, *allfurm*, *allskriv*, *allson*, h.a. ;

gant *arall-*, pe evel rakger kenster da *all-*, sk. : *arallyezh*, pe gant kemeradurioù disheñvel : anaout a reer an termennoù Gwironiezh *arallaat* (Gl. *aliéner*, sl. GEAK.

p. 17) ha Kevredadouriezh *arallek* (Gl. *hétérogène*), *arallekaat* (Gl. *aliénation*, sl. *Emsav* 21, p. 271 & passim) ;

gant *ken*, sk. : “ hep *ken* tra ” "hep tra all", *digen* "hep hini all" (sl. GEAK. p. 80, v° *exclusif*).

gant *arall-*, *asken-* : er Yezhoniezh e reer *arallsoniad* g. (Sz. Gl. *allophone*) eus stumm ur soniad a-geñver gant amveziadoù e werc'heladur ; kinniget 'm eus reiñ an anv rumm *askenad* g. da nep stumm gwerc'heladur (Sz. *variant*, Gl. *variante*) ha luniañ diwar ar rakger *asken-* termenoù diforc'hekoc'h eget ar re savet diwar *arall-* : *askensoniad*, *askenneuziad* (Sz. Gl. *allomorphe*), h.a.

gant *darall-* : er Brederouriezh, *darallañ* (sl. La-10, pp. 238, 241) ;

gant *dasken-*, pe evel rakger en Drevoniezh da verkañ allded ha liested, sk. : *daskendiriad* aa. (Gl. *allopatrique*) "adanv spesadoù bevion o trigañ e douaregorioù diseurt" (sl. KIS-366, La-09, p. 156) ; pe evel stirann er Brederouriezh : *dasken* aa. & g., *daskenad* g., *daskended* b., h.a. "kement a zo oc'h entalañ allded ha liested anvevenn" (sl. KIS-474, La-10, 284) ;

~ er Vevoniezh har er Vezekniezh e keveneber kealioù an *un* hag an *all* e meur a zegouezh, sl. KIS-360, La-09, pp. 123 hh.

En notenn-mañ e tibaban ober gant *all*, *allded* da verkañ "ar peb all eus an traoù" [213] e-keñver an hinienn vev, "kement a zo en tu all da harzoù ar bevedeg" [222], o virout *amgen* evit ar c'heñverioù buhezel.

Br. **an-un** [223], **anunded** b. [213, 223]. A-zivout Br. *an-un*, *en-un*, *evit an-un*, sl. KIS-347, La-09, pp. 15-16. Ober a ran gant *an-un* evel kevatal da La. *ipse*, Gl. *soi*, Al. *sich*, *selbst*, *sich selbst* ; gant *anunded* a-dal da La. *ipseitas*. Alies e vez roet La. *ipseitas* ha *haecceitas* da heñvelsterioù, sl. KIS-534, La-11, p. 181 ha *henneded*, *hennev* amañ dindan.

Br. **angorzh** aa. & g. [225], **angorzhañ**, **diangorzh** [213, 214, 220]. Br. *angorzhañ* zo kevatal da Gl. *concerner* en unan eus e gemeradurioù : "kaout udb. en amgant e wered, kaout dalc'h war udb.", ur c'hemeradur all o vezañ "(a-zivout ur prepoz) sellout ouzh, desellout" (sl. GSTL. ¶ 848). Br. *bezañ angorzhet gant udb.*, *bezañ en angorzh udb.* "bezañ e dalc'h udb., bezañ engwezhiet en udb.". En destenn, “ *diangorzh* diouzh an amzer ” [214] zo da intent : "dizalc'h diouzh gwered an amzer, e-maez delanvad an amzer" ; “ arvez an « ezhomm » hon doug en tu-hont d'an *diangorzh* ez eo hini ar c'heñver eeun furm-danvez ” [220] a gomprenet evel henn : "goubarel eo ar c'heñver furm-danvez hag e se dodet e-maez amgant ar c'heñverioù louereel ampleget gant an ezhomm".

Br. **arun** aa., g. [216, 217], **arunded** b. Betek henn ez eus bet pledet gant an *arunded* en derc'hennoù : er Jedoniezh gant an “an daveadur a *arunded*” (sl. KIS-501, La-10, p. 402), en Dareulerezh hag er Boelloniezh gant an *arunderc'hañ* (sl. KIS-359, La-09, p. 87 ; KIS-516, La-11, p. 51) ; er Brederouriezh gant an *arunwerc'hañ* (sl. KIS-516, id., p. 52). An arunderc'hañ zo reiñ meur a stumm d'an un erganad. Evit an arunwerc'hañ, daoust d'a c'hallfed soñjal diwar eil kdrann an termen, zo da renkañ ivez e kant an derc'hennañ : kinniget 'm eus an anvad-se evit ar bennaenn o haeriñ e vez dezreadus nep stad eus ar werc'helezh vloc'hel diouzh nep stad all anezhi ; un arlakadenn drabedel n'eo ken, kentoc'h ar c'hourlakadenn ouzh ar werc'helezh eus ur bennaenn danzeet en derc'helezh.

A natur all eo an arunded lakaet a-wel gant JONAS. Pa lavar emañ ar bev “en arun klok e pep mare gant e zafar kempred”, gant an elfennoù a ya d'e ober, e haer unded an hinienn vev. N'he haer ket avat evel ma haerer unded an den galvet war un dro Némo ha Hemon — furm a arunded derc'hennel hon eus anvet *unded treselladel* : daou sell, div zerc'henn oc'h aroueziñ an un ergeñverenn. E tro an hinienn vev, hervez ar sell ivez, ez ambreder n'eo mui unan met div ergeñverenn : ur werc'henn vevedel, ar bev, louet, ur werc'henn alvezel, al lanvad danvez ouzh e ober, ken louet all, an div werc'henn-se o vezañ unan evelkent, oc'h amparañ un ergorenn diac'hinek — diac'hinegezh o splannañ en devoud emañ an hinienn vev en *arun* gant al lanvad danvez he ampar hep bezañ *hevelep* outañ [217].

Penaos savlec'hiañ ar rizh unded dibarek-se ? D'e ober, e ro JONAS da gentañ skouer flamm ar c'houlouenn. En arun emañ ivez gant al lanvad danvez he ampar, hogen n'eus dezhi nemet un *hinienn ded kedet* — ha kediñ zo derc'hennañ, ac'hoel emañ e gwizienn an derc'hennañ. An diforc'h etre an hinienn vev hag ar flamm eo ez eo kedet hinienn ded ar flamm hag *andoniek* hinienn ded ar bev. Bezañ andoniek zo un devoud kentañ na c'haller ket sevel en argrec'h dezhañ, na c'haller na despizañ na, seul gent a se, dezren. Anv zo enta eus an *arunded etre ur werc'henn dezhi hinienn ded andoniek hag al lanvad elfennoù alvezel ez eo hi*. Unded an hinienn vev zo dezverket gant an arunded etre hennadoù a zo etrezo ul lamm n'eo ket hepken gouiziadel mat ivez beziadel, eleze ur c'heñver a drehontelezh. Alese an anv a ginnigan reiñ da seurt arunded diac'hinek : *arunded diazerc'h*. Arveret eo bet an termen *diazerc'h* endeo da verkañ saviadoù ha beziadoù oc'h entalañ ur c'heñver a drehontelezh, peurgetket e tachenn an nid, eleze e-keñver ar genel gwerc'hennoù digent o anien (sl. *Emsav passim* & 74, 1973, pp. 48 hh. pergen).

Br. **aveziñ**, **avez** g. [210], (sl. KIS-176, La-07, p. 55). War-benn hepkoriñ pep arvar a zenervannañ ez akedan kement ha ma c'hallan da zebazh pep a steudad

termenoù da zomanoù ar beved hag ar vuhez. E se, pa ra JONAS gant Sz. “*perception, locomotion, desire*”, e ran gant Br. “*merzout, emzilec'hiañ, c'hoantaat*” pa vez anv a vuhez, gant Br. “*haeziñ, loc'hañ, aveziñ*” pa vez anv a veved. Egin an diforc'h a gaver gant SPINOZA a rae eus an *desiderium* an *appetitus* deuet emouiziek.

Br. **bed** g. [220, 223]. Boas eur e lavar ar preder da lakaat kemm etre an *alvez* (gwerc'helezh fizikel) ha *bed* (gwerc'helezh denel). Ar gudenn a sav eo penaos aroueziñ ar werc'helezh vevedel — kudenn a voundoniezh a gaver stignet gant holc'h JONAS (merkomp e kefarz a-wechoù ar ger « *world* »). O tibab Br. *bed* amañ e kredan dodañ ar werc'helezh vevedel, n'eo ket evel un astenn, un heklev d'ar werc'helezh denel, hogen evel ar poent genel anezhi diouzh sell ar c'hevandarzh [211].

Br. **bevervannañ** [224 ennotenn].

Br. **beziat** aa. [212], **beziad** g. [224], **beziadel** aa. [214, 215]. Tro zo bet da venegiñ Br. *beziat, beziad* a-gevatal da La. *ens*, Al. *seiend, Seiendes*, eleze gant ar ster "(pezh a zo) o vout" (sl. KIS-534, La-11, pp. 179 hh.). Amañ ez eo an daou dermen da intent evel "(pezh a zo) o vezout" er ster roet da *bezout* en notenn. Evit *beziadel* a geveneban ouzh *gouziadel* en hevelep doare ma keveneb JONAS *ontological* ouzh *epistemological*, eleze "a-zivout ar beziad louet end-eeun" ouzh "a-zivout ar gouziadur goubarel hon eus anezhañ".

Br. **bezout** [212 & passim]. Eus bodennidigezh ar c'healioù dispaket e sterva *existere* e talc'her abaoe HEIDEGGER an daou gemeradur kevenebek *revout* "*existere* e mod an traoù", *hanvout* "*existere* e mod an den" (sl. KIS-523, La-11, pp. 100 hh.). Padal, an termen *bezout* arveret gant Maodez GLANNDOUR e ster ar Skolastik : "*esse, actus essendi*" (id., ibid., p. 102) a gavan mat adkemer amañ gant ar ster "*existere* e mod ar bevion" : *revout* o vezañ re nes da "bezañ eus", eleze hep entalañ keal ur gwezhiañ, *hanvout* o vezañ piaou digen mab den, e hañval din *bezout* bezañ dereatañ da aroueziñ *actus essendi* an hiniennoù bev. An doare *in actu* eus an *esse* bevedel zo kantreizh din evit an dilez a ran peurliesañ eus ar pennanv *bezoud* e gounid ar pennanor *bezout*.

Br. **brouer** b. [223 n., 225] (kv. Kb. *brwydr* "conflict, attack, struggle")¹ a ginnigan da gevatal da La. *conatus* evel ma'z eo bet despizet gant SPINOZA : “ An

¹ Klasket e voe nesaat ur BrT. ‘ *brouër* ’ a lenner e reveziadenn nemeti e GBI. I 72 (en ur pezh ‘ tennet euz papero ann aotro J.- M. PENGUERN ’) : ‘ He dent gant *brouër* ’n euz skrignet ’. Dre

tued ma striv pep tra da drebadaout en e vout ned eo ket estreget anien weredel an kez tra ”².

Br. **daskenad** g., sl. **all** diagent.

Br. **davedelezh**, **davediñ** [220, 225]. Br. *davediñ* "tennañ da vont etrezek un davedenn (amkan, pal pe finvez)" ; Br. *davedelezh* "devoud an davediñ, meizad an davediñ" — e-lec'h all e vo studiet an argraf-mañ a bled gantañ ar Brederouriezh hag ar Vevoniezh.

Br. **denervannañ** [210, 224 ennotenn].

Br. **digen** aa. [222], sl. **all**.

Br. **dizank** aa. & g., **dizankañ**, **dizankted** b. [216 & passim], sl. [216 ennotenn] pergen.

Br. **enien** aa. [224], **ezien** aa. [212], sl. KIS-519, La-11, pp. 79 hh.

Br. **gouziadel** [214], sl. **beziat**.

Br. **gwezhiañ** [213, 224]. Er yezh resis eur boas da gevenebañ *ober*, a-berzh an den, ha *gwerediñ*, en amgant an traoù. Ar gudenn a sav eo pe verb arverañ evit an *agere* en amgant ar beved, a-berzh an hinienn vev. Furoc'h 'm eus kavet tremen gant *gwezhiañ*, eleze ar verb gant an erdal ledanañ.

Br. **hennded** b., **hennev** g. [212]. Keal kenradet gant DUNS SCOT er furmoù La. *ecceitas*, *haecceitas* "ar bezañ henn, eleze ar bezañ an dra-mañ ha nann un dra all" (sl. KIS-534, La-11, p. 181). E-kichen *hennded* e kinnigan amañ *hennev*, luniet diwar batrom *pezhev* (sl. KIS-534, id., ibid.) : "*henn eo* ha n'eo ket un dra all".

Br. **hiniennaat**, **hiniennded** b. [passim]. War ar verboù deveret diwar Br. *hinienn* e rener un dezzrann heñvel a-walc'h ouzh an hini bet renet war ar verboù deveret diwar Br. *spesad* (sl. KIS-437, La-10, p. 132) :

1) evel derc'hañ, anaout :

un notenn draoñ e roe AN UHEL da c'houzout ne anaveze ket ar ger. E dreiñ a reas dre Gl. "rage" o soñjal e oa un adstumm diwar Br. *brouez*. Trugarez da Martial MENARD evit ar sklaeridur en deus roet din war ar c'hraf-mañ.

² "Conatus, quo unaquaque res in suo esse perseverare conatur, nihil est praeter ipsius rei actualem essentiam." *Eth.* III, prop. 7.

~ 1a) denaout : "savelañ un hinienn dre ziddermenañ he doareennoù", Br. *hiniennekaat* ;

~ 1b) daznaout : "dizoleiñ pe hinienn eo hemañ-henn". Ur Br. *hinienniñ* a c'hallfed luniañ nemet e reer kentoc'h gant Br. *hennadiñ* ;

2) evel gwerc'hañ, devoudañ :

~ 2a) "dont, lakaat da vezañ hinienn", Br. *hiniennaat*, sk. : "elfennoù yezh dija *hiniennaet*, dija strizhkefridiet" (kentañ reveziadenn ar verb, KIS-SADED, *Preder* 53-54, 1963, p. 94) ; en destenn-mañ : "pennaenn an *hiniennaat*", La. "principium *individuationis*". En ul lavar amstrishoc'h e c'hallfed ober kenkoulz gant *hiniennekaat* er c'hemeradur-mañ ;

~ 2b) "gounit, pourchas, dervaat doareennoù hinienn", Br. *hiniennekaat* sk. : "ezhomm o deus an dud en em *hiniennekaat* en ur framm a jaoj outo" (kentañ reveziadenn, Youenn OLIER, *Preder* 72-73, 1965, p. 26.).

Ar adanvioù deveret diwar Br. *hinienn* zo :

~ Br. *hiniennel* "e-keñver an hinienn, piaouet gant an hinienn", sk. : "labour *hiniennel* ha labour strollennel", "perzhioù *hiniennel* ha perzhioù spesadel" ;

~ Br. *hiniennek* "dezhañ doareennoù hinienn, amparus d'an hinienn", sk. : "hollsturienn da Vuhez Mab den en he fezh, hag enebet evel-se ouzh kement zo prevez ha *hiniennek*" (kentañ reveziadenn, Pol ROLLAND-GWALC'H, *Preder* 26, 1961, p. 17).

Ar pennanvioù deveret diwar Br. *hinienn* zo :

~ Br. *hiniennelezh* b. "ar bezañ hiniennel (er sell diouzh an erdal), ar bezañ piaouet gant an hinienn", sk. : "*hiniennelezh* ar c'hentanv ha strollennelezh an anv tiegezh" ;

~ Br. *hiniennegezh* b. "ar bezañ hiniennek (er sell diouzh an ental), ar piaouañ doareennoù hinienn", sk. : "en deus labour ar vicherourion kollet pep *hiniennegezh*" (K. MARX & F. ENGELS, br. F. FAVEREAU, *Preder* 114, 1968, p. 20) ;

~ Br. *hiniennded* b. "ar bezañ hinienn" — deverad all a'm eus kredet ouzhpennañ en notenn-mañ war-benn diraez ar resisted vrasañ. Anat eo ne vezer ket endalc'het bep tro d'ober stad eus an arlvioù ster a zo etre an termen-mañ hag an daou all. E KIS-501, La-10, p. 397 e skrivan : "N'eo ket bet pourvezet dezhañ e *hiniennegezh* dre c'hanadur" pa'm bije gallet arverañ *hiniennded* en ul lavar resisoc'h.

Br. **kedañ** [215 hh.] "a-berzh ur bev, piaouer enta d'un hiniennded andoniek, kefledañ hiniennded d'an anvev". Evit heuliañ digejidigezh ar c'heal e brezhoneg, sl. KIS-501, La-10, pp. 397-398.

Br. **kemmirout** [225]. Deurus eo keñveriañ keal yonazek ar *continuation* (Br. *trebadout*, kevenebet ouzh ar *preservation*, Br. *kemmirout*) gant ar *Selbsterhaltungstrieb* freudek (sl. GBLF. ¶ 1030).

Br. **kesoutañ** [216]. Ar gudenn oa envel an ere arbennik a zo e-barzh ar bev etre *treanded* (alvezel) ha *treüded* (vevedel). Dibabet 'm eus ar verb *kesoutañ* ha deveret an araogenn *a-gesout gant*.

Br. **kevandarzh** g. [211 & 211 n.]. An termen *kevandarzh* a lunian diwar batrom Br. *undarzh* "diorreadur an hinienn vev" (Et. *ontogeniezh*) ha *hildarzh* "emdroadur ar spesadoù bev" (Et. *filogeniezh*) ; keal arlakadec a roan dezhañ an erdal ledanañ : adalek an alvez betek mab den.

Br. **kevun** aa. [211] "o revout a-ziforc'h, peurheñvel a-du-rall". Evit heuliañ digejidigezh ar c'heal e brezhoneg, sl. La-10 : KIS-471, pp. 266 hh. ; KIS-474, pp. 283 hh. ; KIS-501, pp. 393 hh.

Br. **koaliñ** [215]. Hervez HUSSERL, "dodiñ ar bed zo krediñ" : ne c'haller ket dienaar ez eus eus ar bed, revoud hemañ a zarbenner dre berzh ur c'hrediñ, un *Doxa*, ur *c'hoaliñ* (sl. KIS-501, La-10, p. 396).

Br. **naoudi** g. [215 hh.] "merk hennadiñ", sl. GSTL. ¶ 1927 ; alese, *naoudiañ* "merkañ diwar-bouez un naoudi ; daskavout an naoudi".

Br. **rankout** [217 hh.]. A-dal d'ar goulun klasel o kevenebiñ *rezid* ha *retvez* a-geñver gant ar vuhez e oa da savelañ ur goulun nevez a-geñver gant ar beved etre an *dizank(añ)* hag an destrizh lakaet gantañ war ar bev — destrizh despizet gant JONAS evel an *ezhomm*, termen a gavan bastus klokaat o reiñ dezhañ *rankout* da verb keñverek.

Br. **treaniñ** [213 & passim], **trean** aa. & g., **treanded** b. [213 & passim] (kv. Br. *ehan* < **eks-* + *-an-*, Iw. *anaim* "e vanan" DGVB. pp. 154, 268) a ginnigan da zec'heriañ ar c'heal a dalvez da JONAS da arouezañ an "trebadout anniñv" a zo hini an alvez a-gevenep d'an *treüniñ* (*andoniek*), bezout evel gwezhiañ, piaou ar beved, a c'hallfed despizañ evel "*trebadout niñvek*, gwell : *brouerek*") [sl. 223 ennotenn].

Br. **treüniñ** [213 & passim], **treün** aa. & g. [221], **treüded** b. [213 & passim]. Despizet eo bet an *dreüded* evel "hevelepted treadegel, eleze hevelepted un hinienn dre an amzer" (sl. La-10, KIS-471, pp. 268 hh. ; KIS-501, pp. 395 hh.) ; a-gevenep

d'an *treaniñ* evel "trebadout anniñv" ez intenter an *treiñniñ* evel "hevelepted unangrouet, emseveniñ kendalc'hek" [212].

ARROUDOU SAOZNEK ORIN ²

- (a) In the philosophical tradition, the concept of the individual was for long governed by the concept of numerical singularity. The question was asked : what makes two things that are otherwise entirely the same, different in number ? « Otherwise the same » meant : the same in kind ; and since « kind » comprises whatever is predicable and thus common, the mere difference in number must mean a difference in something inexpressible. This inexpressible, it was held, is « matter », the unresolvable support for essence in the world of fact, (« Whatever is many in number, has matter », Arist., *Met.*, XII, 8). [...] Matter, therefore, was regarded as the *principium individuationis*. (p. 185)
- (b) One makes it [individuality] too extraneous, relational and adventitious ; the other too immanent, self-contained and absolute ; and both make it a universal possession of all concrete entities, coextensive with particular existence as such. (p. 186)
- (c) [Traditional theory] views the individual from without, as an object of knowledge, noting the traits by which for the beholder it exceeds its general concept. In contradistinction I wish here to take a stand « within », asking what it is to *be* an individual — for the individual itself. (p. 186)

² Orin an arroudoù saoznek zo *Philosophical Essays — From Ancient Creed To Technological Man*, Prentice-Hall, Inc., Englewood Cliffs, New Jersey, 1974, pp. 185-205 (adembannadur eus pennad 1968). Trugarez da Paol KEINEG a'm skoazellas da gaout an destenn-mañ.

- (d) Only those entities are individuals whose being is their own doing (and thus, in a sense, their task) : entities, in other words, that are delivered up to their being for their being, so that their being is committed to them, and they are committed to keeping up this being by ever renewed acts of it. Entities, therefore, which in their being are exposed to the alternative of not-being as potentially imminent, and achieve being in answer to this constant imminence ; entities, therefore, that are temporal in their innermost nature, that have being only by everbecoming, with each moment posing a new issue in their history ; whose *identity* over time is thus, not the inert one of a permanent substratum, but the self-created one of continuous performance ; entities, finally, whose *difference* from the *other*, from the rest of things, is not adventitious and indifferent to them, but a dynamic attribute of their being, in that the tension of this difference is the very medium of each one's maintaining itself in its selfhood by standing off the other and communing with it at the same time. (p. 187)
- (e) The internal features so described must, of course, first be approached by their signs in the « external » evidence, the purely physical record — which we are equipped to « read », i.e. to recognize *as* signs of individuality, by being individuals ourselves. And it must be shown that the being-structures thus revealed indeed represent the conditions of individuality as a distinct mode of being, not an indifferent attribute of all being. Should it be the case that, unbeknown to us, all real entities satisfy those conditions in some measure — a not inconceivable possibility — then all entities would have individuality to that extent. If, on the other hand, as might seem at first, only beings of the order of « person » fit them, then the range of individuality would be contracted to the human sphere. My contention will be that, on the evidence penetrable to us, the proposed conditions are exhibited by organisms and organisms only, but in some measure by *all* organisms : that they are integral to organic being as such ; and that therefore the realm of individuality, in all its grades, is coextensive with the biological realm as a whole. (p. 187)
- (f) Let us [...] ask : in what manner does an entity possess identity ? If we take the classical exemplar of ultimate individuality, the *atomon* of the ancient Atomists, we should there expect to find the rock-bottom of identity as such. But what does identity here mean ? To

put the question differently ; If I equate the atom at moment *A* with the atom at moment *B*, what right do I have for that equation ? On what basis does the claim of identity rest ? Ontologically speaking, it rests on the presumed inertness or constancy of matter ; epistemologically, on my confidence that on demand I can verify, by continuous observation, that the atom was « present » through all of the intermediate moments between *A* and *B*, and was missing from none. In the ontological respect, then, the classical Atomist thinks of the unmediated, fixed, but also empty self-identity that is equivalent with immunity to time : with the fact, that is, that the final residue of all reduction exists in each of its bits « once for all », and that these bits are mutually external once for all. The single stubborn particle is then simply and inertly what it is, immediately identical with itself, without need to maintain that self-identity as an act of its existence. Its enduring is mere remaining, not re-assertion of being ; and in remaining it is successively « identical » thanks to the homogeneous continuity of the dimensions — space and time — in which the sequence of « its » states takes place. [...] Such sequence constitutes the « path » of the unit, and for the assigning of identity it is essential that this path has no gaps in fact, even if it has in observation : in principle at least, the spacetime continuity of the particle must be verifiable throughout. (p. 188)

- (g) Or else, we may substitute for the continuity of individuals that of the probability-spread or the « field » in which such intermittent presences take place, thus saving some descriptive sense of « identity » on a more comprehensive plane. In that case, of course, we have again resorted to the space-time continuum as the logical determinant. (p. 189)
- (h) Wishing to ascertain, therefore, whether a body has stayed « the same » between two observations the physicist would ideally have to put identifying marks on all of its atoms and check on the later occasion whether it still consists of all the marked ones and of no others. Barring evidence of the contrary, this is taken for granted, and weighing the mass is deemed a sufficient control. The general assumption is that, left alone, and whatever the lapse of time, a substance will offer to repeated inspection the same inventory of parts. This is what is strictly meant by the sameness of the thing. (pp. 189-190)

- (i) Suppose that from among a number of amoebae one has been « marked » for identification in subsequent inspections. And suppose that in addition all its atomic parts at the time too have been marked individually. Upon later inspection the organism, identified by its mark, is found to be still there, but — with the sum roughly unchanged — to consist only partly of marked and partly of unmarked elements ; and upon still later inspection it will be found that, though the « collective » mark has stayed, none of the individual units has remained under the common label. [...] Physically speaking, the object of the later inspection is a different entity altogether. Yet no biologist would take this evidence to mean that he is not dealing with the same organic individual. (p. 190)
- (j) The testimony of the « label » is true precisely *in conjunction* with that of the « elements », for the latter testimony tells the *story* of the identity which the former proclaims. Thus we are faced with the ontological (not only epistemological) fact of an identity totally different from physical identity, yet grounded in transactions among substrates of physical identity. We must evaluate this highly intriguing fact of ontology. (pp. 190-191)
- (k) There seems to obtain a rather paradoxical situation. On the one hand the living being *is* a composite of matter, and at any time its reality totally coincides with its contemporary stuff — that is, with one definite manifold of individual components. On the other hand, it is not identical with this or any such simultaneous total, and its reality is not bound to the assemblage making it up now, as this is forever vanishing downstream in the flow of exchange ; in this respect it is different from its stuff and not the sum of it. We have thus the case of a substantial entity enjoying a sort of *freedom* with respect to its own substance, and independence from that same matter of which it nonetheless wholly consists. (p. 191)
- (l) However, though independent of the sameness of this matter, it is dependent on the change of it, on its progressing permanently and sufficiently, and there is no freedom in this. Thus the exercise of the freedom which the living thing enjoys is rather a stern *necessity*. This necessity we call « need », which obtains only where existence is unassured and identity a continual task. (p. 191)

- (m) The living individual exists at any one time in one simultaneous composition of stuff, but is not identical with it — because it is, while coinciding with it, already in the act of passing beyond it. It then exists, over the whole timespan of its life, in a succession of such material compositions through which it passes, but is not identical with the succession or its complete sum either — because it is whole in each of them. Its identity is thus neither the momentary one of co-temporaneous space-parts — in that case it would have as many identities as successive moments, that is, none at all — nor is it the aggregate of its serial time-parts, that is, of all the successively co-temporaneous sets together — in that case it would always be only a fraction of itself. (pp. 191-192)
- (n) It would be simple if we could say that the bearer of identity in its continual change is the « soul », posited as an entity apart. In that case, the bodily change would be to this persisting subject as a change of garment is to its wearer ; and the image is completed by making the wearer also the weaver of the garment. However, this would be to evade the problem by a metaphysical substitution. It amounts to saying that what is alive is not the body but something else : then the « living » body would be no better than a puppet. Yet the problem consists precisely in the manner of being of the organism itself, whether this in addition be the « garment » of something else or not. The activities it is engaged in are its own, or it is not alive. The identity we are investigating cannot be dissociated from it and assigned to another bearer. The separation of the « weaver » from the « woven », borrowed from the human handling of lifeless materials, in fact destroys the object of the inquiry. (p. 192)
- (o) It is obvious that in some way we are dealing with the relation between matter and form. For at least one of the things which is preserved in the change of component elements, or one aspect of the sameness preserved in the change, is surely the « form » of the organic whole, and this in the sense not only of visual shape but of the whole structural and dynamical order of a manifold. A classic example of such preservation of identity through that of form is the famous Athenian state-ship which from time immemorial performed the annual voyage to the Delian sanctuary : repaired over and over again by the replacement of worn-out parts, it finally contained not

one of its original planks, ropes, or sails, yet was still held to be the same venerable vessel of old. On what does the claim of identity here rest ? First, of course, on the sameness of form. But this is not enough : an exact replica would be an individual of the same kind, but not the same individual. At the same time, it is too much, for even some changes of form, the addition or removal of a structure, would leave a ship the same « individual ». Besides the continued similarity of form, there must be a space-time continuity in its material representation, that is, in the existence of the physical compound that is its bearer : an unbroken sequence of physical presence such that it constitutes the history of one subject. [...] Thus it is similarity of form and unity of history that together constitute the sameness of the object in the face of total exchange of material and, as the case may be, of partial change of form. (pp. 192-193)

- (p) For one thing, in the ship the changes are effected from without, that is, by agents other than the entity itself : this is merely the passive object of them. In the organism the changes — waste no less than replacement — are effected from within : it is its own agent for change.

Secondly, the very necessity for replacement arises in the case of the ship by accident only : it can be more or less lucky on its voyages, and in shelter may not undergo any wear at all. In the organism, the need is as concurrent with the act of existing (because arising from it) as is its supply : its very being consists in the constantly self-renewing interplay of both. And whereas it would be considered a mark of excellence for the ship to withstand use without the need for repair, for the organism the mark of excellence is not immunity to wear, but efficiency of repair — nay, even the very variety and scopes of the *needs* which are generated by its existing as such. For its existence *is* performance, whereas for the ship existence and performance are two different things. (193)

- (q) But the decisive observation, of course, is that to the artefact the identity is *accorded* ; [...] the identity [of the ship] is the function of another identity, namely, that established in memory, individual and social. This originative identity of the cognitive subject is a prerequisite for the accorded identity of the object. But this original identity, being that of living beings, is just a case of what we are enquiring into, and if this is required for explaining the presumed

analogue, then the analogy itself fails, and we are back at the question of organic identity itself. This we have acknowledged as owned by, not loaned to its subject. (pp. 193-194)

- (r) The observation on identity as « merely accorded » must be expanded into the observation that the extraneous *purposiveness* which insists on regarding the ship as still « the same » after all its repairs, is the same purposiveness that went into *making* the repairs, and making, first of all, the ship itself : in the active as well as in the cognitive respect the identity is the function of a *teleology* outside the object. It is this teleology of maker, user, and beholder to which the matter is accidental and the form essential. We cannot credit the ship itself with any such teleology : in Aristotelian terms, it is not an « entelechy ». It is therefore also no true individual, and thus has, in fact, quite apart from the series of successive states, no unitary identity at any one time, but merely the collection of all the identities of its parts. Consequently, the question of « its » identity in change does not really arise. (p. 194)
- (s) In the precarious metabolic continuity of the organic form, with its perpetual turnover of constituents, identity cannot derive from the substratum. Nor would the mere propagation of pattern through the sum of the transactions be enough to yield identity. [...] Thus likeness (at its maximum, sameness) of form is different from identity of being ; and the fact that the same form is continuously exhibited in a sequence of physical situations does not by itself make the serial presence that of an identical individual. Else a candle-flame, with the constancy of bounded form maintained through the measured consumption of fuel, which it successively incorporates and gives off, would be a case of individual identity. And we are intuitively certain that the flame is not an individual. Thus neither matter nor form nor even their conjunction — the *synholon* which in Aristotle defines individual substance — answers the question of identity in the case of the organism. (p. 194)
- (t) If, before, we noted the sameness of the form freely sustaining « itself » by the exchange of its matter, we have now to take seriously the reflexive pronoun « itself », that is, to locate the identity in something that exercises and enjoys this freedom — which abstract form as such cannot do. In short, the ontological individual

requires, behind the continuity of form, *internal* identity as the subject of its existing *in actu*. Even « form » itself, i.e. the very structure dynamically securing its own preservation — and with it the whole fitness of organization to this effect, which formally is the vicious circle of a fitness to preserve fitness — must be deemed to be in the *service* of that self-related identity. (pp. 194-195)

- (^u) It is the aspect of « need » which gets us beyond the indifference of the mere form-matter relation. We said before that the « freedom » which the living, i.e. metabolizing, entity enjoys relative to matter is matched by the necessity to exercise that freedom. This necessity is its need, namely, the need for constant self-renewal, and thus need for the matter required in that renewal, and thus need for « world ». (195)
- (^v) Need, indigence, insufficiency is no less unique a distinction of life than is its power, of which it is the other side. This is where Leibniz' monadology goes wrong [...] Leibniz' monad, self-enclosed, self-actualizing, invulnerable, certainly exemplifies the classical concept of independent substance which, as the definition has it, « requires nothing else in order to exist ». But such self-sufficiency applies, if to anything at all, to lifeless stuff. Of a particle of matter we may at least imagine that it does not « need » anything outside itself to exist. It is what it is, whether there are others around it or not. We can imagine the rest of the world annihilated and would still have the same lone atom ; and the continuance of its existence is assumed to follow entirely from the fact of its once being there. If surrounded by others, it will interact with them : but its acting and suffering are accidents of which the substance is the invariant subject. This independence, however, has nothing to do with freedom ; on the contrary, it excludes it. The existence of the particle is given, not a task to be performed ; thus it has necessity, but no need. (p. 195)
- (^w) Metabolism essentially includes these two sides, which means that the liberty of life is itself its peculiar necessity. Its being, suspended in possibility, is to be actualized by the *use* of the world. The power to use the world, this unique prerogative of life, has its precise reverse in the necessity of having to use it. For the organism, to exist, in fact, *is* to use and keep using « something else » — therefore to need it. The dependence here in force is the cost

incurred by primeval substance in venturing upon the career of organic, that is, self-constituting, identity, in the place of merely inert persistence. Because of the metabolizing mode of this identity, need is of its very essence and it is thus with it from the beginning. But the very *means* evolved to serve this need, such as perception, locomotion, desire, add new kinds of satisfaction. This dialectic too is of the essence of life. The spectrum of needs belonging to an organism is the measure of the degree of its freedom and individuality. (pp. 195-196)

- (x) What has just been outlined amounts to saying that the mere phenomenon of *metabolism*, often considered to be no more than the elementary level that underlies, and supplies energy for, the quite different higher functions of life (such as perception, locomotion and desire), in fact contains in its own primary constitution the groundwork as it were of all those functions, which may or may not evolve on its basis. It presages them by enacting *within itself* the cardinal polarities which those functions will expand and span with their more determinate relationships : the *polarity of being and not-being, of self and world, of the freedom and necessity*. (p. 196)
- (y) The introduction of the term « self », unavoidable in any description of the most elementary instance of life, indicates the emergence, with life as such, of internal identity — and hence, as one with that emergence, its self-isolation as well from all the rest of reality. Profound singleness and heterogeneity within a universe of homogeneously interrelated existence mark the selfhood of organism. An identity which from moment to moment reasserts itself, achieves itself, and defies the equalizing forces of physical sameness all around, is truly pitted against the rest of things. In the hazardous polarization thus ventured upon by emerging life, that which is not « itself » and borders on the realm of internal identity from without assumes at once for the living individual the character of absolute otherness. The challenge of « selfhood » qualifies everything beyond the boundaries of the organism as foreign and somehow opposite : as « world », within which, by which, and against which it is committed to maintain itself. Without this universal counterpart of « other », there would be no « self ». (p. 196)

(z) Now to an entity that carries on its existence by way of constant regenerative activity we impute *concern*. The minimum concern is to be, i.e. to carry on being — what Spinoza has called the *conatus* to stay in existence. <> But Spinoza, with the knowledge of his time, did not realize that the *conatus* to persevere in being can only operate as a movement that goes constantly *beyond* the given state of things. What, in its total effect, appears to be the maintaining of the given condition, is in fact achieved by way of a continuous moving beyond the given condition. There is an openness, a horizon, intrinsic to the very existence of the organic individual. Concerned with its being, engaged in the business of it, it must *for the sake* of this being let go of it as it is now so as to lay hold of it as it will be. Its continuation is always more than mere preservation. (p. 197)